



Son an hañv

Skrivet gant Paotr Treoure

Deuet eo an hañv, kaer an amzer,
An heol gant e domder (bis)
War an douar a skuilh bemdez
Al laouenedigez- la, la !

Diskan :
Kanomp, kanomp, p'eo deut an hañv,
d'an eostig da ganañ.

Er parkeier an ed melen,
A hej, a bleg o fenn, (bis)
War-sav ! labourerien douar,
C'hwi `po un eost dispar _ la, la !

Er prad, er c'hoad, nag a vleunioù,
C'hwez vat gant o delioù (bis)
O ! Nag eo koant hor breizh-izel,
maret he mantell ! - la, la !

Al laboused e beg ar gwez,
A gan o c'harantez (bis)
O ! lezit din , bugaligoù
Da sevel o neizioù - la, la !

Emañ digor ar pardonioù,
An ebat, ar gouelioù.
Paotred ha merc'hedbezit fur,
Hag ho-po plijadur.